

---

---

## SON AR C'HIZOU NEVE

---

# IAOUANKIZ KEMPER

HA TRO VAR DRO

---

P'am euz kavet eunn tamm amzer,  
Eur banne liou, eunn tamm paper,  
Em euz sonjet sevel eur zon,  
Da dud va bro ha va c'hanton.

Gret eo 'vit ar c'hizou neve,  
A veler goall stank o vale ;  
Dre ma zo darn anezho fall,  
Out-ho ve ezomm da ziouall.

Va c'homz kenta zo d'ar merc'hed  
Da ziskouez penaoz int koefet ;  
Ama dreist holl e tro Kemper,  
Pa zeller out-ho e heuger.

N'euz mui a goefou var ho fenn ;  
Nemet eur begadik lien ;  
A zo henvel diouz teod ar c'haz,  
Pa lez ho fennou holl e noaz.

Gant ho bleo enn ho daoulagad,  
Ouz keban int henvel m'ervad ;  
Guintet ho c'hoesik var ho choak,  
Lavaret ve vent vont d'ar groug.

Ouzpenn, ho goug zo dizolo,  
Gant chadenn vont enn-dro d'ezho  
Ha var ho daouarn manegou,  
Seuliou triz dindan ho boutou.

N'ho daouarn a zo disc'hlaoyer,  
Ha pa ve tom, ve disheollier ;  
Zo ho hano parapluiou  
Ann diveza parasoliou.

Faë eo gant-ho komz brezonek,  
Koulzkoude 'zraillont ar gallek ;  
Kaer 'deuz goaska ho muzellou,  
Ober chistrout gant ho ginou.

Ne d-int 'met tammou mitien,  
Pe merc'hed c'hoaz da ostisien ;  
Krampoezerezed, ferrezed,  
Lavaret ve intronezed.

Pa zilez va flac'h he golvez,  
Ve sonjet e ve eur gontez ;  
Gant ar perlez o lugerni,  
Veler ker stank enn dro d'ezhi.

Keginerez ha plac'h a gampr,  
A zo out-ho goall-rust ann tamm,  
Betek merc'hed ann nadoiou  
A renker gervel mamzellou.

Eur viltans eo sur ho guelet  
Dre vreac'h 'vel pa vent dimezet  
Gant Iann-zoudard ha mansouner,  
Gant kere ha gant boutaouer.

Eur vech brema ve deut ann noz,  
Hag eat ho mistri da repoz,  
Kalz plac'hed guita ho zier  
A zeui enn dro 'raok ma saver.

D'ann ostaleri, d'ar c'hafe,  
Kalz ia da eva eur banne ;  
Savet gant-ho huel ho fenn,  
Skoaz ha skoaz gant ar yourc'hisien.

Araok eva ho banneou,  
Va merc'bed rai kalzik taillou ;  
Mes eur vech evet daou pe dri,  
Ne vo gant-ho tamm chistrout mui.

Savaret 'reont ken divergont,  
Odevi, kafe a lonkont,  
C'hoarzin ha gotrdrouz bep eil tro,  
Dizale 'vad ni ho guelo.

Diskennet int ebarz er ru,  
Kroazigella 'reont enn daou du,  
N'hellont mui ober ho chistrou,  
Ouspenn, koll a raint ho c'hoefou !

Poent ez eo d'hoc'h merc'hed Kemper,  
Dilezel krenn p'hoc'h euz amzer,  
Ann henchou fall, ho koall vue,  
Evit servich mad ho Toue.

Ehan a ran gant ar merc'hed,  
Breman z'eomp da vad d'ar goazed;  
Da velet hag int zo furoc'h,  
Pe marteze zoken sotoc'h.

Sellit out-ho var ann dachenn,  
Neudet brao tre eo ho chupenn,  
Lugerni ra gant ann neud sei,  
Ar voulouz du, a-zeou, a-glei.

Bragezet mad ez int ive  
Ha chiletennet a zoare,  
Gant eunn tok bordet var ho feññ,  
Eur roched neudet n'ho c'herc'hen.

Chadenn ha mont 'zoug ar baotred,  
ENN ho zreid c'hoaz boutou siret,  
Sigarenn, pibenn zo n'ho bek,  
Distaga reont spesiou galley.

Eunn dra a gaver divalo,  
A ra lod a c'hoazed ar vro,  
Eo n'ho bek lakaat eur chikenn,  
Da zerc'hel sonj euz ar chukenn.

Gant eur banne dindan ho fri  
Ho gueler enn ostaleri ;  
Ar c'hlaouren rous tont dioc'h ho bek  
Ha mil boan d'ar baotred c'hoaz preg !

Ho pennou oa savet huel,  
Hag ho teod a oa distagell ;  
Brema na rit 'met balbouzat  
Louz ho pek ha skeulf ho lagad.

Horjella a rit ádarre,  
Ann dud a gred peuz evet re !  
Koueza rafot var ann dachenn  
Ha saotret a vo ho chupenn.

A fors da eva, da c'blaouri,  
Va faotred zo kouezet er pri !  
Stlabezet 'deuz ho chupenn c'hlaz,  
Kollet ho zok 'maint e penn noaz !

P'oa kouezet va faotred iaouank,  
Siouaz ! d'ezho, e kreiz ar fank !  
Penn ho fri a oa bet skignet,  
Gant ho dillad holl kaillaret !

Ha c'hoaz ann dud a oa eno,  
Lec'h ho zevel, c'hoarze d'ezho,  
Ouz ho guelet o tivoada,  
Lec'h ve ar moc'h en em zaotra !

Lavaret rejont da Laouïk,  
Kouls ha d'he vignoun keaz Iannik,  
« Poan peuz paotred n'hoc'h izili,  
« Dao eo sevel raok koueza mui.

« Da bardonna, da frikota,  
« Z'it gant dillad euz ar brava,  
« Penaoz d'ar gear zeuit diskabell,  
« Gant ho pennou stouet izel ?  
  
« Dispignet peuz sur hoc'h arc'hant,  
« Var ar briz, kollet ho skiant,  
« Hag evitho peuz bet netra,  
« Neinet ho tillad da zec'ha !

N'eo ket difennet gant Doue,  
Diouz sec'het eva eur banne ;  
Arabad 'vad ez eo krevi,  
Pa gaver mad ann odevi.

Dilerc'h ar moc'h jom restaichou,  
Ha var lerc'h ar zaout ar griou ;  
Penaoz eta skouezfe ann dud,  
Izeloc'h 'vit al loened mud ?

Guelet rer loenet pevar droad,  
O rei d'ann dud eur gentel vad ;  
Rak n'ho c'haver ket astennet  
Var ann hent goude d'he debret.

Ouzpenn garont ho re vian,  
Miret reont n'ezho ouz ar boan ;  
Lec'h veler ezec'h ha gragez,  
Lezel ho re enn dienez.


Kalz merc'hed ha kalz a c'hoazed,  
A gredo m'o ho dikriet,  
Dre ma m'euz skoet var ho friou,  
O sonjal skei var ar c'hizou.

Mes piou bennak a zello mad,  
Gant-han digor he zaoulagad,  
A velo sklear ann disursiou,  
Er vro deut da heul ar c'hizou.

Greg, bugale gant mesventi,  
Gaver aliez o c'hlaouri ;  
Gant ho zud siouaz ! dilezet,  
A zesk eo guir 'r pez m'euz laret.

MIKEAL Q\*\*\*

(Tous droits réservés.)



# IMPALAER AR RUSSI

LAZET

D'an drizec a viz Meurs 1881

TON : *Va c'halon a zo fraillet pe eun all.*

Me o ped 'ta Bretonet, c'houi tud a Vreiz-Izel,  
Da glevet eur verz neve, var eun torfet kruel  
'Zo gret, siouaz ! d'an drizek euz miz meurs er bлоa-ma,  
Gant Nihilistet difeїz, tud demeuz ar falla !

Hentchit d'in o va Doue, hentchit 'ta va fluen,  
'Vit skriva e mil eiz kant un ha pevar ugent,  
An torfet great er blos-ma 'barz e bro ar Russi,  
Er gear a Zant-Petersbourg gant bombou Orsini !

An dud fall o doa klasket, pemp guech araok hirio,  
Da Impalaer ar vro-se, rei tol fall ar maro !  
Ar c'henta hini, siouaz ! 'barz e Sant-Petersbourg,  
A glaskaz e laza, oa Karagozoff, traitour.

Pa edo an den fall-se o vonet da denna  
Var an Impalaer, siouaz ! 'vit gellout he laza;  
Voe bet guelet eur paësant o pegi en he vreac'h  
Ha d'an torfetour bras-se hen en em gavaz treac'h !

Allas ! evit an eil guech 'oa tennet var-nezhan,  
E voa ebarz e Paris, Napoleon tri ganthan !  
Eur marc'h zoken oe tizet gant tenn Berezowski,  
Pa edo o klask laza Impalaer ar Russi.

Solowieff zo bet an trede demeuz ar vuntrerien ;  
Var an Impalaer karet en doa tennet pemp tenn :  
Mes gant Doue diouallet euz a nerz an tennou,  
Ar Czar n'oa'met he vantel toullet gant bolojou !

Ar bedervet guech, siouaz ! a oa klasket an tu  
Da rei dezhan ar maro a oa dre ar marc'h-du,  
Evit an torfet Hartmann n'oa laket 'n he speret  
'N eur vina an hent houarn an trein vije strinkel.

Faiet oa var he dorfet kerkouls hag he dud fall,  
Trein ar Czar a dremenaz, hen c'hortozaz eun all ;  
Lammet a ra an eil trein 'kredi oa 'n Impalaer,  
Ha padal ne oa eno nemet he zillad kaer !

Alexandr daou zo hirio saveteet he vuez,  
Dre ma zint bet faziet en ho fallagriez.  
Mes meur a hini, siouaz ! 'n euz kollet he groc'hen,  
P'eo bet drailllet didanno trein hag hent gant eun tenn !

Pedir guech 'n euz ho guelet klask an tu d'he laza,  
Ha hirio 'vit ar bempet 'maint sonjal he flastra ;  
Rak minet 'deuz he balez 'leac'h ma vez ho tibri,  
Evit gellout he vouga pe gant tan he zevi.

N'oa ket c'hoaz an Impalaer 'barz er zal erruet.  
Pa oa gant an dud fall-se, siouaz ! en ear strinket ;  
Rak ar re-man doa sonjet ober dezhan he dol,  
'Pad ma vije ho tibri gant he dud euz an dol !

Ar Czar oa c'hoaz o prezeg gant tud er meas ar zal,  
Pa oa gant Nihilistet, an ti oll o strakal ;  
Dek soudard ha tri-ugent oa enterret eno :  
Seiz ha daou-ugent blesset ha dek, siouaz ! maro.

'Vit hirio o deuz kollet dre eurvad ho amzer,  
O klask he laza, siouaz ! 'n he di an Impalaer !  
Flastret zo bet kouskoude, gant an Nihilistet,  
Dre ho daouarn miliget, a leiz a zoudardet.

Ho guelet on deuz brema pemp gueich o klask diskar,  
Dre ho zorsejou kruel an Impalaer ar Czar ;  
Ha hirio 'vit ar c'huec'hvet 'zeuint aben d'he laza  
Gant bombou fall Orsini, traou euz ar c'hruella !

Setu 'ma brema, siouaz ! digouezet marteze  
An devez trist 'vit ar Czar ma renk koll he vue ;  
Goude kreizte, d'an drizek a viz meurs tremenet,  
Hen a oa eet da velet revu he zoudardet !

Allas ! n'eur vont d'he balez euz a vanej Michel,  
Eleac'h m'oa bet o velet he zoudardet fidel,  
Hen a ieaz da velet he c'hoar gaer d'he falez,  
Evit ar veich diveza, siouaz ! 'vit ar vuez.

P'en devoa gret he visit oa o tistrei d'he di,  
Ebarz n'he gariolen pa oar deut d'he brevi,  
Rak eun den fallakr, siouaz ! e ru Milliopa,  
Stlapaz eur bomb didannhi 'vit gellout he drailla !

Gant ar bomb-se o krevi ar vouetur oe draillet,  
Ha d'an Impalaer, siouaz ! lazet kalz soudardet !  
Heman 'n eur vel an torfet 'ziskeñnaz d'ho zicour,  
« Pegit brema emezhan ; pegit batz en traitour ! »

Neuze ar bobl gant coler a begaz er muntrer  
Dre m'en doa klasket siouaz ! laza an Impalaer ;  
Bez e oa eun den iaouank, Roussakoff he hano,  
Ha hirio 'vit he dorfet an dud her miligo !

An Impalaer a jomaz evit c'hoaz hep gouli  
Epad m'oa en dro dezhan tud 'n ho goad o veuzi,  
Mes 'vit he voal-heur, siouaz ! hen vale var he droad  
Pa oa draillet he vouetur gant bomb eun den ingrad !

'N oa great 'met nebeut pasiou oa guelet eun den fall,  
'Stlapa tre he zivesker, siouaz ! eur goal vomb all ;  
Ha trous houman o krevi 'reaz d'ar guer strinka,  
Var an tiez oa eno ha d'an holl dud koueza !

Pa oa eet kuit ar moget, neuze e oa guelet  
E oa gant ar bomb, siouaz ! 'n Impalaer gouliet,  
Draillet dezhan he ziou c'har, he gorf oll e gouli  
Gant nerz an tammou, allas ! eus ar bomb o krevi !

An Impalaer oe douget 'n eur gador d'he balez  
Gant an dud vad glac'haret hep e anaoudegez ;  
E-lec'h da ziveur anter e rentaz he ene,  
Ebarz 'n eur boan ar vrassa, d'an Aotrou he Zoue !

An Impalaer oe ganet d'an dri a viz ebrel,  
Ha d'an drizek a viz meurs, siouaz ! e renk mervel ;  
Er bloaz mil eiz kant triouec'h e oa ganet ar Czar,  
E un ha pevar-ugent lazet gant tud digar !

Bez en devoa evel-se tri bloaz ha tri-ugent,  
Pa zeo bet, siouaz ! lazet gant an dorsetourien !  
Evit he oll zujidi oa eun den ar guella,  
Ha mad he vro a glaske da genta e pep tra.

MIKEAL Q\*\*\*\*

(Tous droits réservés.)

E ti Gourlay, ru ar Brovidans, n° 19, e Kemper. Eno e kaver c'hoaz meur a hini all evel : *Jesuisted Kemper. Ann Holl Venec'h. Eur belek dal. Maro Gambetta pe Lazer gant eur c'h.... Brezel Tonkin pe Chin. Son ann Hini goz, enep ann everezet ha Tud devet Crozon.*

Va zoniou ne bliyont nemeur d'ar Republikaned, mad eo, rak ho c'hasoni a ra enor d'an dud ho deuz feiz.

Quimper, typ. de Kerangal.